

10.

Gwechall war lenn Jenezareth
Ho Mab, hor Zalver benniget
A ouie lakad da devel
Ar gwas a barradou avel.

11.

Ganeoc'h en deuz lezet brema
Galloud ar burzudou kaera,
Beillit d'ho tro Mamm a druez
War o yec'hed hag o buhez.

12.

Hag holl dud Sant Yann Trolimon
A viro deoc'h en o c'halon
Ho plas a vamm, en eur gana
Bennoz d'an Introun Varia.

A. C.

Aotre da voula :

Kemper, 15 a viz C'houevrer 1950.

J. CADIOU,

Vikel Vras.



MEULEUDI HA PEDEN

DA

INTROUN VARIA TRONOAN

e Sant-Yann-Trolimon

1.

Savomp hor c'halon kristenien
Ha kanomp holl a vouez hor penn,
Evit enori ha pedi
Ar Werc'hez gloriüs Vari.

DISKAN :

*Introun Varia Tronoan,
Rouanez vat parrez Sant-Yann,
Plijet selaou eus barr an nenv
Pedenn war gán ho pugale.*

2.

O Gwerc'hez sakr, hon tadou koz
A garie goulén ho pennoz
Ha setu savet tost d'ar mor,
Eur japel goant en hoc'h enor.

3.

Dëmdost, war eur groaz astennet
Jesus a zeblant lavaret :
« Va Mamm zo aze er japel
Kit 'ta da c'houlén he skoazel. »

4.

Hag e teuent a vandennou
Da ginnig deoc'h o fedennou,
Dirak ar skeuden zo enni,
Kaer hirio c'hoaz en he c'hozni.

5.

Ha dezo, Gwerc'hez c'houi ranne
Grasou d'ar c'horf ha d'an ene
D'ar yaouankiz, d'an dud en oad
D'an den a vor, d'ar c'houeriad.

6.

Setu ni deut ivez d'hon tro
D'ober dirazoc'h eveldo,
Hor peden da c'houlén Gwerc'hez,
Ho pennoz leun a drugarez.

7.

Ho pennoz deomp, bras ha bihan
Ma c'hellimp holl ha peb unan
Ober hon treuz en draonien-ma
'N eur garet Doue dreist peb tra.

8.

Ho pennoz Rouanez Arvor,
Dreist holl d'hon tud a vez war vor
Dre bep seurt amzer o poania
Da c'hounit deomp hon tamm bara.

9.

Ah ! pa vo gant an avel foll
O bag e tro da vont da goll,
Astennit dezo, ni ho ped
Ho tourn madelezus meurbet.